

Dastumad Pennwern : dornskrid 89

46. IANNIK SKOULDRIN

(follennou 149 - 152)

Iannik Skouldrin hag he paeron
 zo ed o daou da c'houlen pardon

Da c'houlen pardon evit ho hineou
 Remission d'ho fec'hejou.

Debonjour a joa en ti man
 hag ed oc'h oll da kousket henan ?

Nen domp ket ed tout da kousket
 Me zo chomet var an oallet

Me a zo aman va hunan
 war an ollet e paka an tan.

Intron varia dimeus ar sklerdet
 Na dre pelec'h e zeoc'h entreet ?

Me moa serret va frenestou
 morallet mat va dorojou.

- tavit va mam na voelit ket
 me eo ar mab o pca ganet.

zo deud breman d'ho koëlllet.
 - Mar de te eo ar mab am'boa ganet

Me'm boa he gwen te lianet
 he du e zout deud dam goëlet.

Du he da fass a ta uzou
 du eo da zillet var da dro,
 evel e zoud deus an diaoulou

- Deoc'h ar pugator e deuan
 da tan an ivern mond a ran

da leski evit an eur a james
 ma mam, pardonnit, va mam ges.

- 126 -

Ta pardoni me ne rin ket
Kruel bras e c'heus doue offenset
da varo ta tad te a zo bet kiriek.

ia ma mam gout a ran nem eus.
dre ar glac'har a va gwir geus
pa zon pardonet gant doue
ma mam ma fardonit ive.

ta pardonni me ne rin ket
kruel bras teus doue offenset
ta ziou c'hoar e teus violet.

ia , va mam, goud a ran (n)e meus.
dre va glahar a va gwir geus
pa zon pardonnet gant doue
va mam, ma pardonnit ive.

ta pardonni me ne rin ket
kruel bras e teus doue, offenset
ilis gwir sikour te c'heus laeret
lac'het an tan ebars el lampr
laeret ar men ar sakramant.

ia va mam goud a ran e meus.
Dre va klac'har a va gwir geus
Pa zon pardonnet gant Doue
va mam, ma fardonnit ive.

ta pardoni, me ne rin ket
Kruel bras e teus Doue offenset
laket an tan ebars em forn
losket triwarc'h aneval gorn.

Ia va mam goud a ran ne meus
Dre va klahar a va gwir geus
Pa zon pardonné net gant Doue
Va mam, ma fardonnit ive.

Ta pardonni me ne rin ket
Kruel bras e c'heus Doue offenset
va leeur bian te c'heus laeret
eman er mor tregon gouret
nemet teier follien anezan.

eunan dre vor, eunal dre tan
eunal dre c'hras ar Speret glan.

va mam digorit ho harmel
 va el mad deus han digasset din.

he paeron a voa gantan
 hag a kommanç da prezek breman.

- penos mam kris a dinatur
 ne pardonfes ket ta krouadur.

hag en pardonnet din gant^o doue
 ne deuffes ket de pardonni ive.

° (kompreñ:
 digant)

- mar d'he pardonet gant doue,
 me a deu de pardonni ive.

emaïnt ho daou e vond d'an env
 benos Doue var ho hene.

—————
 vvvvvvvv

Jannet Puil, 13 janvier 1851

—————
 vvvvvvvvvvvvvvvvvv